

Difennet eo implij ar jederezh

Taolet e vo pled gant ar reizhskrivadur hag an doare d'en em zispleg dre-skrid : 4 poent.

LODENN GENTAÑ Istor - geografiezh

(18 poent)

Pep kandidat a zibabo ur sujed hepken etre an daou kinniget.


Kentañ sujed

Japan, ur Galloud meur ha diglok koulskoude.

Dielloù

Diell 1

Bae Nagoya



GROUPEMENT INTERACADÉMIQUE II -		DIPLÔME NATIONAL DU BREVET
Coefficient 2	Session 2002	Durée : 2 heures
Spécialité : COLLÈGE, option LV2		Épreuve : HISTOIRE-GEOGRAPHIE
Normal Juin	Ce sujet comporte 7 pages	Page 1/7

Diell N°2
Galloud Japan, hini S.U.A hag hini Alamagn

	S. U.A	Alamagn	Japan
Ezel eus ar G7	ya	ya	ya
PBG (renk er bed)	1 ^{añ}	3 ^{vet}	2 ^{vet}
Niver a embregerezhioù bras (renk er bed)	1 ^{añ}	3 ^{vet}	2 ^{vet}
Postadurioù war-eeun en estrenvro (Renk er bed)	1 ^{añ}	4 ^{vet}	3 ^{vet}
Ezel da viken e Kuzul Surentez an UNO	ya	ket	ket

Diwar Gérard Dorel, "La puissance des Etats", *La Documentation photographique*,
 La Documentation française, n°8006, 1998.

Diell N°3
Japan, ur Galloud diazezet war ar mor.

Daoust da Japan bezañ nemet an eil pe an trede Stad er bed evit ar pezh a denn da dalvoudegezh he c'henwerzh gant an estrenvro, emañ, a-bell zoken, er c'hentañ renk a pa seller ouzh fard he c'henwerzh dre vor. C'hwec'h porzh-mor japanat zoken a gaved e-touez an daouzek porzh er bed o doa labourer ouzhpenn kant milion a donelladoù marc'hadourezh e 1996.

Hollad uhel-bras an emporzhiadurioù marc'hadourezh ponner degaset dre vor a zo trawalc'h da ziskouez pegen suj d'an diavaez eo ar vro e-keñver an energiezh, an danveziou diaoz, ar boued. En eil renk er bed, goude Alamagn, en em gav Japan evit an emporzhiañ danvez gounezet diwar al labour-douar ; er c'hentañ renk evit ar c'hoad hag ar paper. Suj eo a 100% evit ar petrol dreist-holl : prenet e vez an tri-c'hart anezhañ digant Stadoù pleg-mor Persia ; 260 milion a donelladoù petrol diaoz a dremen evel-se dre porzhioù-mor Japan, hep kontañ ar gaz dourennekaet o tont deus Indonezia ha Malezia. Emporzhiat e vez 120 milion a donelladoù kailh-houarn gant siderurgiezh Japan, dezhi da chom an hini gentañ er bed.

En trede renk er bed en em gav ivez Japan evit ar pesketa (6,7 milion a donelladoù en 1997)

Diwar Gérard Dorel, "La puissance des Etats", *La Documentation photographique*,
 La Documentation française, n°8006, 1998.

Goulennou
 8 poent

Goulenn 1.

Diell 1 : Lec'hiit ha savit roll an aozadurioù bet savet war vae Nagoya. Diskouezit o emdroadur.

Goulenn 2.

Diell 2 : War beseurt tachennoù en em ziskouez galloud Japan ? Kadarnit ho respont.

Goulenn 3.

Dielloù 1, 2, 3 : Peseurt skoilhoù a c'hell bevenniñ pe disteraat galloud Japan hervez an dielloù-mañ ?

Pennad arguziñ
 10 poent

Savit - gant skoazell titouroù tennet deus an dielloù hag ar pezh ho peus desket - ur pennad war ar sujed-mañ: "Japan, ur Galloud meur ha diglok koulzoude". (Tro 20 linennad)

Eil sujed

URSS Stalin, ur renad totalitaer

Dielloù

Diell N°1

Lizher skrivet gant ur peizant d'ar gazetenn "Hor C'hêriadenn", war-dro 1930.

Kamaraded, skriv a rit en ho kazetenn ez a laouen ha skañv an holl beizanted baour hag ar re un disterig en o-aes da c'houlenn dor zigor gant ar c'holkoz, met kement-se n'eo ket ar wirionez. En hor c'hêriadenn-ni, da skouer, n'eo ket aet an holl dre gaer er c'holkoz. Pa oa bet digoret ha lakaet da dremen roll an emezellañ ne oa bet nemet 25% a dud o sinañ pa oa chomet 75% hep hen ober. Dastumet e oa bet an hadoù ganto, der heg, dre sevel skridoù-tamall, dre doullbac'hañ. Ha ma krede unan bennak diskouez e oa a-enep e veze kinniget dezhañ er c'has d'an toull pe d'ar galeoù.(1)

Faziet e oac'h war ar poent-mañ, kamaraded : ar vuhez kolektiv n'eus ket tu sevel anezhi nemet ma 'z eo hollad ar beizanted prest da zegemer ar sistem-se a galon vat, ha n'eo ket dre griz. (...) Plijet ganeoc'h tevel war ma anv, kuit da lakaat paotred ar strollad da vont en araj

(1) kas unan bennak d'ur c'hamp labour ret.

Diell N°2.

Skritell propaganda.

СПАСИБО
РОДНОМУ СТАЛИНУ
ЗА СЧАСТЛИВОЕ ДЕТСТВО!



«Trugarez d'hor Stalin karet
da reiñ deomp ur bugaleaj evurus».

Diell N°3.

Teuliad un den tamallet e-pad prantad ar spont bras etre 1936 ha 1938.

Elfennoù tennet eus an teuliad

Anv : Sidorov

Anv bihan : Vassili Klementovich

Ganet e... / d'an ... : Setchevo, e-kostez Moskva, 1893.

Micher : implijad en ur c'hooperativ.

Orin sosial : En em lakaat a ran evel mab d'ur peizant a renk etre.

Buhez hag emzalc'h politikel : E strollad ebet.

Ezel eus Strollad Komunour Rusia : Ket.

Harzet d'an 13 a viz C'hwevrer 1938.

Tamalladenn (arroudou)

Sidorov, bet troet da c'hoari a-enep ar galloud dre vras, hag a-enep ar strollad da gentañ, en deus kaset da benn ur propaganda enepsoviedel diehan en ul lavarout : «Stalin hag e vandenn ne vennont ket dilezel ar galloud. Stalin en deus lazhet bernioù tud, met ne venn ket mont kuit anezhañ. Ar volcheviked a vir ar galloud evito, a laka an dud onest en toull-bac'h, ha kement-mañ ne vezer ket zoken evit komz anezhañ gant an aon da vezañ kaset d'ur c'hamp bennak 25 bloavezh pad».

Sidorov, an tamallad, en deus en em ziskleriet evel digablus met diskuliet eo bet a-drugarez da veur a destenni all.

Barnidigezh, 16 a viz Gouere 1938 (arroudou)

Tamallet da vezañ strewet brudoù a-enep an dispac'h e-mesk ar c'holkozidi, da vezañ diskleriet komzoù o sevel a-enep an trec'h, da vezañ diskouezet enebiezh a-enep ar gomunisted ha da vezañ savet e vouezh a-enep politikerezh ar Strollad hag ar gouarnamant.

Setañs : Sidorov Vassili Klementovitch da vezañ FUZUILHET hag e holl vadoù da vezañ tennet digantañ.

Setañs sevennet d'an 3 a viz Eost 1938.

Diwar Stéphane Courtois et autres,

Le livre noir du communisme, crimes, terreur et répression, R. Laffont, 1997.

Goulennoù

8 poent

Goulen 1.

Dielloù 1, 2 ha 3 : Peseurt doareoù a veze implijet gant Stalin da sujañ poblañs Rusia ha da lakaat anezhi da gerzhout hervez e soñjoù ?

Goulen 2.

Dielloù 1 ha 3 : Diskouezet penaos ne oa ket holl dud URSS a-du gant politikerezh Stalin ?

Goulen 3.

Dielloù 1, 2 ha 3 : Daoust hag-eñ e klote mat ar skeudenn a glaske ar bropaganda brudañ diwar-benn Stalin gant an titouroù a gaver en daou diell all ? Kadarnit ho respont.

Pennad arguziñ

10 poent

Savit - gant skoazell titouroù tennet deus an dielloù hag ar pezh ho peus desket - ur pennad war ar sujed-mañ: "URSS Stalin, ur gennad totalitaer"(tro 20 linennad).

EIL LODENN : DESKADUREZH KEODEDEL.

(12 poent)


Sujed

Aozadur galloudoù ar Republik :
ar prezidant, ar gouarnamant, ar parlamant.

Dielloù

Diell Nnn 1

Mont en-dro ensavadurioù ar V^{vet} Republik



Diell Nnn 2

Arroud tennet deus Bonreizh 1958.

Mellad 10 : Prezidant ar Republik eo a embann al lezennoù a-barzh pemzektez d'ar muiañ goude d'al lezenn bezañ bet kaset d'ar Gouarnamant ur wech degemeret da vat.

Mellad 11: Gant Prezidant ar Republik emañ ar gwir da c'houleñ ur referendum a-zivout pep danvez lezenn o tennañ da aozadur ar galloudoù publik, o tennañ da adkempenn politikerezh ekonomikel pe sosial ar vroad ha d'ar servijoù publik karget d'o seveniñ.

Mellad 12 : Prezidant ar republik en deus ar galloud, goude dezhañ bezañ goulet o soñj digant ar Ministr Kentañ ha digant pennoù ar Gambr hag ar Sened, da zivodañ ar Gambr Vroadel. An dilennadegoù hollek a rank bezañ aozet etre ugent devezh d'an abretañ ha daou-ugent devezh d'an tardetañ goude an divodañ .

Mellad 15 : Prezidant ar Republik eo a zo e penn an armeoù.

Mellad 17 : Prezidant ar Republik en deus ar gwir da sevel ar c'hastizoù.

Diell Nnn 3

Arroud deus kaoz an Aotrou Jacques Chirac, Prezidant ar republik, d'ar 21 a viz Ebrel 1997 ;bannet er radio ha war an tele.

Kenvroidi ker,

Goude din bezañ goulet o soñj digant ar Ministr Kentañ, digant Prezidant ar Sened ha Prezidant ar Gambr Vroadel, em eus divizet divodañ ar Gambr Vroadel. Warc'hoazh vintin e vo embannet an dekred divodañ hag an dekred o lakaat an dilennadegoù d'ar Gambr d'ar 25 a viz Mae ha d'ar 1añ a Viz Even. (...)

Graet eo ma soñj din, ha krediñ a ran sonn hiziv e rankomp kaout mouezhiadegoù abretoc'h evit mad ar vro. Kendrec'het on e ranker reiñ ar gaoz d'ar bobl, dezhi da embann fraezh he soñj diwar-benn ment ar cheñchamantoù hag al lusk d'o seveniñ a-hed ar pemp bloavezh da zont. (...)

Goulennoù

4 poent

Goulen 1.

Diell 1 :

- a) Petra eo roll ar gouarnamant ?
- b) Piv a c'hell kinnig al lezennoù ?
- c) Penaos e teuer da vezañ Prezidant ar republik ? Ha Ministr Kentañ ?

Goulen 2.

Diell 2 :

- a) Klaskit daou eus galloudoù Prezidant ar republik o tennañ d'al lezenn.
- b) Peseurt galloudoù en deus ar Prezidant war dachenn an arme ha war dachenn ar justis ?

Goulen 3.

Dielloù 2 ha 3 :

- a) War be mellad eus ar Vonreizh en em harpe Prezidant ar republik evit kemer e ziviz ?
- b) Un arguzenn personel a zegase ivez : pehini ?

Pennad arguziñ

8 poent

Savit ur pennad war ar sujed-mañ: "Aozadur galloudoù ar republik : ar prezidant, ar gouarnamant, ar parlamant" ; evit arguzenniñ, c'hwi a raio al liamm etre an titouroù kinniget en dielloù. (tro 15 linennad).

ARABAT SKRIVAN TRA EBET AMAN.

Arabata disoñjal reiñ ar follenn-mañ ur wech leuniet ganeoc'h !

TEIRVET LODENN : KAVOUT E VERKOU EN AMZER

EN EM RETERIN WAR AN DOUAR.

(6 poent)

1° - Peseurt cheñchamant a oa bet degaset d'ar gwir da votiñ e Frañs e 1944 ?

.....

2° - E pe bloavezh e oa bet kurunet Charlez-Veur ?

3° - Livit ha skrivit anvioù ar pevar stad-mañ war ar blanisferenn : *Brazil, Japan, Mec'hiko, Ejipt.*

e,

